

I.

Ahu, ar paotr mogn

Bez' edo Ahu, ur paotr yaouank krenn, blev du hir ha rodellet dezhañ o kempenn keuneud e kev don Lizenn Zu. Ur pezh mell kambr e oa eus ar c'hev-se, toull et en ur belkad roc'h, uhelder c'hwec'h gour dezhi ha peadra da lakaat ouzhpenn kant den en o sav enni. Un tamm ode strizh, un toull enk, a oa evit mont er c'hev, ledan a-walc'h evit korf un den da dremen drezañ. Kompez 'oa leure ar sal vras, ha sonn ha flour ar roc'h a-dal d'an ode. Pakañ a rae ar gouloù-deiz. Ouzh ar roc'h-se edo Ahu o sevel ur skeul, gant keff ur wezenn vezv ha skourroù kraoñ-kelvez. Da bep troatad e stage ur pennad skourr gant lêrennoù, a-skouer gant ar c'hef. Evel-se e c'hellfe pignat d'an nec'h en ur lakaat e dreid a-bep-eil war ar skourroù-se. Difrae e laboure ar paotr yaouank gant e zorn kleiz hag e c'henoù, o vezañ ma oa mogn e vrec'h zehoù, chomet berr anezhi uheloc'h eget an ilin. Er stuz-se e oa bet ganet.

E-ser stardañ al lêrennoù en-dro d'ar skourroù ha d'ar c'hef e teue da soñj dezhañ eus e vugaleaj. A-vec'h ganet e oa bet dilezet gant e vamm, diouzh doare, o

vezañ ma oa gwall nammet. Evel-se e veze graet gant ar grouadurioù a c’hane hep ur vrec’h pe ur c’har, pe hepto o-div a-dachadoù, ar re gamm, ar re dort, toc’hor pe distumm. Ne vefent ket gouest d’en em zibab en o buhez, ober labourioù start, chaseal, brezeliñ ; hag ar merc’hed ne c’hellfent ket genel bugale yac’h ha disi.

Setu ma voe lezet ar paotrig Ahu en ur goadeg digenvez. Dre eurvad e oa tremenet dre eno, damdost war-lerc’h, ur strollad chaseourien a oa o tispenn roudoù un tropellad kirvi. Kavet e voe ar bugelig o vlejal, gant ur vaouez yaouank eus ar strollad-se. En em gannañ a rankas ouzh un aneval gouez a oa darbet dezhañ drailhañ ar paotrig. Kas a reas Ahu ganti, dre druez. Ne oa ket gouest-hi da gaout bugale, setu ma teuas da vezañ mamm hep bezañ gwilioudet.

En arroud-mañ en doa ar meuriad nevez graet e ziazez. En ur saonenn c’houdor etre daou gleger bras hag uhel. En andred-se e oa bevañs, louzaouennoù, gwrizioù, frouezh, loened bras ha bihan, laboused a bep seurt ment, ha pesked er stêr a dreuze an draoñienn evit mont da bakañ ar mor bras er pelloù. Pebezh disamm evito, bet keid-all o kantren e-kreiz an dañjerioù bras.

Ez-vihan e oa bet desavet Ahu a-gostez diouzh ar vugale all. Ne oa ket gouest da c’hoari na da labourat e-giz ar re all a oad gantañ. Goap a veze graet outañ gant ar baotredigoù all, danvez chaseourien ha brezelourien anezho. E vamm ivez – Rana hec’h anv – a veze disme-gañset gant ar merc’hed all. « Difrouezh he c’horf, soñjit ’ta ! »

Uhelder daou c’hour en doa tapet Ahu gant e skeul. Ret e oa dezhi bezañ kreñv rak c’hoari a vefe war he gorre. Bep un tamm edo ar gouloù-deiz o tisteraat. Poent ’oa

dezhañ targañ gant e labour. Renkañ a reas ar skeul, ar skourroù hag al lêrennoù en ur c'horn teñval, dastum e gontell – ur maen-tan lemm oc'h ober al lavnenn anezhi sanket en ur c'horn karv –, ha dao er-maez eus ar c'hev. O paouez kregiñ 'oa an nevezamzer, ne oa ket gwall hir an deiz c'hoazh. Ha stagañ da redek, ur pennad mat a oa ac'hano d'ar gêriadenn.

II.

Ar gêriadenn e toull Pennher

Sammet gantañ e sac'h lâr ouzh e gein edo Ahu o c'haloupat er strouezheg, herr gantañ. Louzaouennoù ha gwrizioù plantennoù en doa kutuilhet diouzh ar beure, en ur vont da gev Lizenn Zu. Bemdez e veze ret dezhañ labourat evit ar meuriad ha n'eo ket chom da c'hoariellat eo. Bep mintin eta ez ae da zastum danvez boued, endra ma 'z ae ar baotred a oad gantañ da chaseal. Danvez boued ha louzaoù diouzh ar c'hleñvejoù. Ez-vihan en doa desket anaout al louzeier-se. Gouzout a rae pere a veze gellet debriñ ez-c'hriz, pere 'oa ret poazhañ ; peseurt louzaouenn a oa mat ouzh an devadurezh, ouzh ar gorioù, ar pugnizi, an heskidi, ar beskoulou ; diouzh an debron.

Ar stankerez-wad, anvet sklañvac'h c'hoazh, a veze implijet maread, pa veze gloazet an hemolc'herien hag ar vrezelourien.

D'ar Sorser Meur, pareour ar meuriad, e kase Ahu al louzeier-se. Bez' e oa eus ar Sorser-se un den kozh-douar ha ne oa ket gouest da gerzhet a-bell ken. Gouiziegezh

ar meuriad a rumm da rumm, en doa dastumet a-hed e vuhez hir. Desket en doa peseurt implij ober diouzh al louzaouennoù en ur sellet ouzh al loened oc'h ober ganto pa vezent klañv. Bez' e ouie al loened-se turiañ an douar evit klask gwrizioù gouest da skarzhañ o bouzelloù, terriñ o foan pe stankañ ouzh ar gwad. Kalz a skiant a oa deut d'ar Sorser Meur diwar skouer an anevaled. Gant al louzaouennoù degaset dezhañ ec'h aoze diedoù, toazioù, tretoù, pegoù, ogantoù. Dresañ an izili distres pe dorr a ouie ouzhpenn. Nerzh an heol, an avel, an dour, ar vein, a dalveze dezhañ ivez evit gwellaat o yec'hed d'an dud, pep tra anezho dindan galloud an doueed, meulet ra vezint.

En ur vont gant e hent e selle pizh Ahu en-dro dezhañ. Kemm a oa o tont er vro abaoe ur frapad amzer. Gwechall-gozh, diouzh doare, ur pennad mat a-raok ma oa ganet ar paotr yaouank, e oa yenoç'h an amzer. Skornet e veze an dour hag an douar e-pad ul lodenn hir eus ar bloaz, rouesoc'h ar gwez hag al louzeier. Tommañ a rae an amzer, pelloc'h, a-hervez. Klouaraat da nebeutañ. Louzaouennoù nevez a oa o tiwan ha loened dianav o tont er vro.

Daoust ma ne oa ket Ahu gouest da vont da hemolc'hiñ gant ar baotred all en doa desket e-unan tapout anevaled bihan. Aozañ a rae pejoù, lasoù-kroug, toulloù-trap d'o fakañ. Pesketa a rae ivez, er stêrioù ha gwazhioù, gant boutigi gwial. Er reier uhel e veze o labouseta. Uioù ha laboused bihan a zeue gantañ d'ar gêr. Un teuzar evit ar begoù lipous ! Hiriv end-eeun en doa tapet ur goniflez en ur riboul. Stanket en doa penn an toull dindan douar ha hilliget al loen pevarzroad gant ur ber hir. Tapet an dimezell he divskouarn hir gantañ, un taol dorn a-dreñv

he choug ha graet ar stal. Pebezh pred milzin a vefe evit e vamm !

O tostaat ouzh ar gêriadenn edo ar paotr yaouank. A-bell e wele ar reier uhel ha sonn ma oa skoachet ar pemp teltenn, savet gant krec'hen kirvi ha bizoned stegnet war sternioù kefioù ha skourroù gwez. E traoñ pep teltenn, oc'h ober an dro anezhi, e oa ur voger izel savet gant mein ruilh evit miret ouzh an dour red hag al loened gouez da vont en ti. Disparti 'oa teltenn Ahu hag e vamm diouzh ar re all ha bihanoc'h egeto. E pep hini eus ar peder lokenn all e oa ur rummad tud o vevañ, gwazed, merc'hed, krennarded, bugale hag ur c'hozhad bennak.

Pa dremenas Ahu hebiou d'an tiez-lien bras edo ar merc'hed oc'h aozañ koan, lod er-maez, lod all en dia-barzh, e-kreiz moked ar c'hig o poazhañ. Ne oa ket distro ar wazed hag ar grennarded diouzh an hemolc'hiñ c'hoazh. Gant ur ger berr hag un hej d'e benn e saludas ar paotr yaouank ar maouezed hag ar plac'hed yaouank. Laouen e voe eilgeriet outañ. Digemeret 'oa gant an holl, pelloc'h, evel ma oa e oa. E vamm ivez a oa krog da zaremprediñ ar merc'hed all, un tamm bennak. Ne 'z aent ket gwall bell ganti avat. Disheñvel e oant diouzh ar re all ha tonket dezho bevañ disparti diouto.

Peuz-darev 'oa ar pred-noz pa en em gavas Ahu en e lokenn. C'hwezhet 'oa bet an tan war ur maen oaled e-kreiz leur an deltenn, bili en-dro dezhañ. Dre un toull en nec'h, etre ar c'hrec'hen, ez ae ar moked er-maez. En he fuch e-tal an tan edo ar vamm o poazhañ un tamm kig. Gant teneredigezh e sellas Ahu outi, ar vamm galonek he doa e savetaet ha desavet anezhañ gant karantez a-enep an holl. Kabac'h e oa-hi deut da vezañ gant an oad, bec'h

he deveze o kerzhet. Daoust d'he foanioù e vinc'hoarzhas ouzh he mab pa dennas hemañ ar c'honifl er-maez eus e sac'h. Antronoz vintin e vefe diskroc'henet ha divouzellet. Gant krec'hen ar c'honifled e veze graet manegeier ha kabelleoù da lakaat pa veze yen an amzer, hag erc'hen da lakaat en o zreid.

Edont krog o-daou da zebriñ o c'hoan pa glevjont tousmac'h er-maez. Klaoustre edo erru ar chaseourien war o c'hiz. Youc'hadeg a oa gant ar baotred ha leñv gant ar merc'hed. Gwalleur bras a oa c'hoarvezet, douetus.

III.

Iha, an hemolc'her taer

O tougen un den war ur c'hravazh edo an hemolc'herien. Iha an hini e oa, ur paotr yaouank a oad gant Ahu. Gwallaozet e oa bet gant un arzh, diouzh doare. Gloazet e oa bet al loen ferv gant ar chaseourien, hogen tec'het kuit en doa gellet ober. Kaset e voe ar gloaziad e telenn ar pennkadour ha lakaet en e c'hourvez e-kichen an tan. Drouklivet e oa ar paourkaezh paotr, dre ur gouli don en e gof edo o koll e wad. Klemm a rae gant ar boan. Dillo e voe lakaet sklanvac'h dezhañ gant ar pareour da stankañ d'ar gwad ha delioù kaol-malo da lakaat ar c'hig troc'h da gleizennañ. Souchet e voe e gorf gant krec'hen tev, rak edo o krenañ gant ar riv. Anoued an dud diwadet ! Ur paotr kadarn 'oa Iha, mard 'oa. Outañ e oa bet Ahu o c'houren, ne oa ket bet evitañ avat, ken kreñv ma oa e gevezer, hag eñ Ahu ken dister all. Bremañ p'edo ar chaseour e par ar marv n'en doa tamm droug ebet outañ ken. Truez avat, ne lavare ket. Tolpet 'oa holl izili ar meuriad o sellet ouzh Iha oc'h ober e dalaroù. Pell hag hir e voe a-barzh lezel e huanadenn ziwezhañ, harpet e gorf ouzh e vamm a oa o stardañ anezhañ, ar merc'hed all o ouelañ kreñv evel

ur c'han a c'hlaç'har. Pa voe nijet ene ar paotr yaouank er-maez eus e gorf, e-giz ul labous bihan, e tibunas ar pennkadour ur rimadell, evitañ da gregiñ gant e imram war-zu inizi ar C'huzh-heol. En devezh war-lerc'h e vefe beziet ar paotr yaouank war dorgenn ar c'horfoù-marv.

Neuze pa voe tavet d'ar gouelvan e tezevellas Odi, ur chaseour yaouank kar da Iha, penaos e oa c'hoarvezet ar gwall-dro. En o fuch e oa aet tud ar meuriad hag Odi en e sav dirazo. Sklêrijennet gant un tantad keuneud e krogas da jestraouiñ an abadenn chase. Beure mat e oa aet ar strollad tud yaouank trema Lizenn Wenn, ur c'hleger bras e kornôg Lizenn Zu. Titouret e oa bet dezho gant ur gedour un tropellad kirvi o peuriñ war-dro eno, en deizioù kent. A-ruzoù ha didrouz-kaer e oa degouezhet ar chaseourien nepell diouzh al loened. Eizh karv a oa anezho, re yaouank-flamm ha reoù all koshoc'hik. Danvez meur a bred evit ar meuriad, krec'hen brav warno ha kerniel hir ouzh pennoù ar re vras. Prim-ha-prim ec'h en em renkas ar baotred kenetrezo. Daouzek a oa anezho, an hanter diouto a redfe war-lerc'h ar c'hirvi en ur youc'hal forzh, an hanter all a stankfe an hent ouzh al loened e nec'h d'un tornaod uhel ha serzh, evit lakaat anezho da lammat d'an traoñ. Aesoc'h a-se peurlazhañ ar re a vefe manet bev. Rannet al labour kenetrezo edo aet Iha asambles gant Odi ha pevar gour all da gichen an tornaod evit gortoz ar c'hirvi. Ken e tifoupas ur pezh mell arzh, ur vamm o tiwall he arzhig yaouank, hag hi a-lamm ouzh ar baotred. Dispont evel atav e oa aet Iha a-benn dezhi. Gant e vouc'hal en doa gelllet gloazañ al loen ferv. Ne oa ket ur seurt tra evit an arhez. Gant he skilfoù lemm he doa toullet didoullet kof ar chaseour yaouank, a-raok bezañ kaset kuit gant ar baotred all.